

# PLONEVEZ-PORZAY

23 octobre 1983

## FÊTE PAROISSIALE

Gwerz an Aotrou Sant-Millio  
Roue Kerne (530-538), patron Ploneve-Porze

1  
E Kerne pemzek kant vloaz' zo,  
Eur zant a rene kaer ar vro;  
Skedus dindan lagad Doue  
'Oa Kerne gant Millio roue.

Diskan

Kanomp, kanomp gant levenez  
Sant Millio, patron ar barrez,  
War an douar roue Kerne,  
En nenv difennour Ploneve.

2

Prestik goude maro Grallon  
E pignas Budig war an tron.  
Budig an doa bet daou vuget  
Ha ne oent tamm ebet henvel.

3

Daou bôtr yaouank en doa Budig,  
Dishenvel, n'eo ket eun tammig  
Millio, den e zoujans Doue,  
Rivod avlus, didrue.

4  
Millio, roue warlec'h e dad,  
A glaskas beza roue mat,  
Mignon d'an holl hag aketus  
Da lakan Kerneviz eurus.

5

Rivod avat 'zeve noz-de,  
C'hoant ruz gantan beza roue  
Paourkêz Millio 'voe dibennet  
Gant e vreur hep truez ebet.

6

Sant Millio, lazet dre 'n avi,  
Sarrit d'an tech-se dor hon ty,  
Lakit ar garantez da ren  
Bepret etouez ar gristenien.

7

Aotrou Sant Millio benniguet,  
Warlec'h hon tadou ni ho ped :  
Diwallit parrez Ploneve,  
Dalc'hit ar feiz start e Kerne.

